

N'eus netra gwelloc'h evit mont war-raok e brezhoneg eget pediñ tud eus Breizh da reiñ lusk d'ar re o deus c'hoant da vont pelloc'h war hent ar yezh, daoust dezho chom pell eus ar vro.

Setu ar pezh a zo bet graet gant Kevredigezh ar Vretoned en Anjev e-pad miz Meurzh. Yann-Bêr Kemener eus Kraon ha Jean Claude Le Ruyet eus Languidig o deus asantet dont tre betek kêr Ansker evit 2 devezh klok, da rannañ o gouizigezh war ar yezh. Ur bennozh evit an holl.



Daou strollad a oa. Ur c'hlas evit an deraouidi o deus kroget er c'hentelioù bloaz zo. Vad a ra kaout ur sell nevez

war an danvez : ar verboù, ar c'hemmadurioù, ha dreist-holl war an doare da zistagañ ar frazennoù. An eil strollad en deus labouret kentoc'h war lusk ar yezh, pe penaos ober evit derc'hel blaz ar yezh hep bezañ re levezonet gant ar galleg. Ur sapre labour a zo bet graet war ar pouez-mouezh. Bev-buhezek e oa ar bedagogiezh implijet gant an 2 gelenner, gant fent e-leizh, d'an deskerien da chom war evezh e-pad ar brezegennou, ken dillo ha ken fonnus.

Dudi

Pa 'z eo deuet an noz o deus aozet ar skolidi ur veilhadege e ti Marie Annick Mary ur plac'h

genidik eus Sant Tegoneg, deuet da vezañ skolaer. Sonioù, kontadennoù a zo bet. Hag ivez ur pezh-c'hoari savet a-ratozh kaer, e brezhoneg evel-just, evit an dibenn-sizhun en deus plijet kalz d'an arvestourien. D'ar sul e oa pedet an dud da weladenniñ mengleuzioù Trelaze bet serret siwazh e bloavezh 2014. Met an dachenn a zo bet treuzfeurmet en ur park evit ar bourmenadenn : 300 devezh-arat chomet hep netra war c'horre nemet an natur hag ar pezh a zo chomet war-lerc'h al labourerien.

Kalz anezho a oa o tont eus Breizh a-bezh met dreist-holl eus kreiz Breizha-hed arganol Brest-Naoned. E 1908 e teue an hanter eus poblans Trelaze eus Breizh. Plijadur zo bet o heulian roudoù ar Vretoned. An displegadennou a oa roet e brezhoneg penn-da-benn gant Jean Danion genidik eus Leuc'han, er Menezioù Du. Ma zo ur mirdi gouestlet d'ar vein glas eo abalamour, dreist-holl, da levezon un nebeud Bretoned evel Marsel Even ha Fañch Helias diazezourien ar gevredigezh a ra war-dro ar vein sklent, digoret a-hed ar bloaz evit ar weladennerien. Ha n'eo ket dre zegouezh ma zo eno ur c'harter anvet Breizh vihan, "La petite Bretagne".

YK

Evid an 31vet devezh kampionad mell-droad Bro-C'hall e tegemere ar SCO skipailh Roazhon e Ansker, goude e daol kaer e Lyon ar sizhun-mañ. Leun a-walc'h e oa tachenn Raymond Kopa gant un nebeud Breizhiz deuet di a-ratozh kaer

wech hent ar rouedoù. Ha setu 2-1 evit Ar SCO... Ne oa ket echuet an abadenn peogwir e adtape Roazhon anezho, o wellaat o c'hont gant daou bal all, unan da heul un taol kastiz. 3-2. Ar weladennerien a seblante kaout an trec'h, ur wech



E-pad un hanter eurvezh kentañ e oa pep skipailh o spiañ an hini all. Dav e oa teurel evezh hag e fin an hanterenn gentan e verkas ar Vretoned dre berzh un taol-kaer gant Ben Arfa a blante ur pal da ward skipailh Anjev. Netra da lârou. Ur wech en-dro war an dachenn e waske c'hoarieren Anjev o c'heneiled a Vreizh ha dindan pemp munutenn e kavent div

evit mat, met 'se a oa hep kontañ war startijenn kuzhet gwarezidi an aotrou Moulin hag un tammig war-lerc'h an amzer ret e lakae Adelaide ar rouedoù da strakal e-pad an astenn-c'hoari. Bec'h a zo bet met e fin ar c'hoariadenn eo bet rannet ar poentoù... Evel ma lâre an Aotrou Stephan, gourdoner Roazhon "Reizhik a-walc'h eo an disoc'h".

YK